



DEDIET D'AN AOUTROU 'N ESKOP KEMPER A LEON

KANTIK

ENN HENOR

DA ITROUN VARIA AR PORZOU

Kurunet e Kastel-Nevez-ar-Faou

26 a viz Eost 1894

TON : *Unis aux concerts des anges.*

Euz a Vrest e teuomp adarre
D'hor chapel dous ar Porzou
Do kuruni, Mam da Zoue!
Leun a joa hor c'halonou.

DISKAN

Guir vugale Kastel-Nevez
Unanomp hor pedennou
Hag kurunomp gant karantez
Hor Rouanez ar Porzou.

Abaoue hor bugaleach
Ez omp bet deoc'huj gouestled
A breman e kreiz hor beach,
Skuiz, meurbet, omp diztroet.

Da ziskouez d'hor Mam burzudus,
Hon ezommou, hon anken,
Evit goulen graçou nerzus,
Da jom bepret kristenien.

An Iliz a zo goal gasset
Tenn ac hirr eo ar brezel,
Evel var mor Genezareth,
Dirollet eo an avel.

Deomp-ni an dud fall a lavar :
« Ho Salver a zo kousket
« Ober a ra skouarn-vouzar
« Ho lest a vezo beuzet. »

Diskouezit d'hon enebourien
Eo dihun Doue hon Tad,
Hag a clev Jezus ho peden
Pa vez poent ho skei da vad.

Hon tadou coz, pennou kalet
Evel kerrek Breiz-Izel
A viskoaz a zo bet brudet
Kristenien stard a fidel.

Dalc'hit sonj, o Mam da Jezus!
Ez omp an heritourien,
Euz o furnez, euz o vertuz,
Euz o feiz, henor ar voen.

Vit derc'hel mad d'o feiz kalet,
Vit kerzel var ho roudou,
Pellaït diouzomp ar pec'het,
Ar goal dentationou.

Bezit eta gant hor Zalver
E pep tiegez kristen,
Hag unanit e pep micher
Mistri a labourerien.

Rentit deomp-ni da virviken,
Doue da Vestr eur skoliou,
Enn e zoujans hag e lezen,
Savit hor bugaligou

Roït ive, d'hon tud yaouank
Vaillantiz hag an henor
Da zifen, e pep bro, a stank
Gloar ar Frans, hag an Arvor.

Da harpa guiriou an Ilis,
Var sao! hon dalc'hit bepret,
Da ziskouez sclear hag e pep giz,
Ez omp c'hoas guir Vretouned.

Eur zell ive Guerc'hez Vari!
Var hon tud coz daoubleget,
Enn o foauiou, enn ho c'hozni
Biken n'ho dilezit ket.

Skuillit ho pennoz, Mam dener !
Var hon tad Leon Trizet
A var Aoutrou 'n Escop Kemper
Hor pastor mad a karet.

Skoazel c'hoas d'ann holl eskibien
Mignounet an Eneou
Hag ive d'an holl veleien,
Bodet hirio ar Porzou.

Ho pennoz, hag hini Jezus,
Da veleien hor parrez,
Gras deomp da heuillia ho vertuz,
Var hent ar guir zantelez.

Euz ho madoberou karget,
Ni lavar a vouez huel,
Kentoc'h vit mankout d'o karet,
E karfemp guelloc'h mervel.

Kenavo, Introun ar Porzou !
Hor Kouanez kurunet,
Kenavo, sourcen a c'hrasou,
Mam dous a muia-karet.

Mar bez pur a mad hor buez
Mar bez santel hor maro,
Jezus var pazen he balez,
Deomp-ni holl a lavaro :

« Guir vugale Kastel-Nevez
« Fidel d'hor Mam ar Porzou,
« Bezit breman, a da jamez,
« E c'hurunen enn Envou ! »

*par Ho me
de Carne.*

IMPRIMATUR :

† HENRICUS,

EP. CORISOP. ET LEONENSIS.

Corisopiti, die 10 Augusti 1894.

Brest, Imp. A. DUMONT, r. Kléber, 11.